



An Aotrou Chaloni BATANY marvet Person e Sant-Vaze, Kemper

BLEUN-BRUG

Niv. 97 (Mizieg-Mensuel)
Koumanant - Abonnement : 500 fr.

MEURS 1957

TAOLIT EVEZ MAD

Gand miz Kerzu emañ ar mare da adkoumananti.

Kasit 500 lur (800 lur kour. a enor — 1.000 lur kour. madoberour) da :

Bleun-Brug, 21, rue Jos. Doury, Nantes.

C. C. P. 1541.90 Nantes.

Kas ar skridoù da : Abbé Bleunven, curé Saint-Renan (Fin.).

Mar fell deoh beza ezel euz ar Bleun-Brug pe rei deom skoazell, kasit ho skodenn da :

V. Seite, Bleun-Brug, Châteaulin, Finist.,

C. C. P. 544.22 Nantes.

Ezel : 500 lur. — Madoberour : 1000 lur.

TAOLENN

Kanviou, gand L. Lok	1
Skol vrezonég an Ao. Batany e skolach Lesneven, gand F. F.....	2
An Aotrou Batany, gand Job Séité	5
Eun nebeud eñvorennoù euz eur bloaz skol gand an Ao. Batany....	7
Le chanoine Batany au travail, gand an Tad Grégoire.....	9
An Ao. Batany ha skol-hañv Rosko e 1947, gand V. S.	12
Ruz, bioh Kergengar, gand Mab an Dig.....	14
Keleier	20

LEVRIOU NEVEZ

PER HELIAS : Mojennoù Breiz : **Ar Mor.** — Skeudennou gand JOZ AN DOARE.

Brudet eo deut da veza, zoken e-mêz a Vreiz, ar rummad levrioù embannet e galleg gand Joz an Doare da ziskleria gand skeudennou ken kaer gened or bro.

Evid ar wech kenta ez eo bet embannet e brezoneg unan euz al levrioù-ze, da gonta deom hiniennou euz ar mojennoù ken anavezet nebeud 'zo war aochou Breiz-Izel. Ar re a zo boazet da zelaou beb sul Radio-Kimerh a oar pegen yah ha flour e hell beza brezoneg Per Helias.

Hastit buan da brena evidoh hag ivez da ginnig d'ho mignoned al levr nevez-se. Emgleo-Breiz. Boite postale 17 Brest. C.C.P. 380.96 Rennes.

Priz al levr : 280 lur franco.

KANOM UHEL. « Kendalc'h » a ro deom eil levrig eur rummad kroget ken mad warlene gand « Breiz or bro ». Eun dastumad a 39 ganaouenn ez eo, ha sur om e kavoh ennañ eun nebeud kanaouennou n'anavezit ket hoaz.

133846

Aotrou Batany

kanviou



Kañviou adarre ! Daou euz or mignoned, mignoned ar brezoneg, a zo ét da anaon : an Aotr. Chaloni Per Batany hag an Tad Goulhen Trebaol. Eun tamm mad a oad o-doa o daou, gwir eo. Med p'en em gav seurt kelou e soñjan : daoust hag e vezo bretoned yaouank da gemered o leh ha da gared o yez hag o bro kement hag a reas an daou-mañ ? Setu ar gentel a zo da denna pa vezom e kañv, goude beza bet lavaret, da genavo, on anaoudegez vad en o henver o tiskleria o buhez hag o oberou.

Per Batany am-eus anavezet ez yaouank. War ar studi edom on daou e skolaj Lesneven. Yaouankohig egedon e oa. Ganet oa bet e Douarnenez e 1888. Goude e studi, kelenner e oe e Lesneven. Eno a roe kentelioù brezoneg. Adaleg ar bloaz 1924 e-noa gounezet, dirag skol-veur Roazon, sertifikajou a ouiziegezh keltieg. Soñj am-eus beza bet goulennet digantañ neuze sevel istor on lennegezh. Den a vicher e oa evid eur seurt leor a ree hag a ra atao diouer d'ar Vretoned ; eul leor hag a vije bet diouz doare ar re a vez laketa etre daouarn skolidi ar skolachou. Eñn dra red a vije, emezañ. Allaz ! chomet eo bet a zav an oberenn e keid ma kendalhen da zastum danvez bet moullet pennadoù anezañ war Arvor, epad m'edo an Aotr. Batany aluzenner e Skol ar Frered Kastellin.

N'oun ket bet souezet gand e leziregezh war ar poent-se rag troetoh oa e spered warzu ar hontadennoù, sonioù, gwerzioù pobl. Den n'o anaveze koulz hag eñ. Eun dudi oa selaou e brezegennou war an danvez-se ha lenn e bennadoù-skrid a veze moulet war « *Le Sentier* », « *Studi hag Ober* » ha « *Kaierou kristen* » dindan ano Kloareg ar Veuzid. (Kontadennoù an Uhel — Pascal Kerenveger — An Itron Saint Prix.)

E 1941 e savas an Aotr. Batany eur mellad oberenn : *Luzel, poète et folkloriste breton* (1821-1895) a dalvezas dezañ an enor da veza anvet Docteur de l'Université de Rennes.

Evid gwir, ne gare ket kalz Luzel bet atao enebour Kermarker, tad ar Barzaz-Breiz. Luzel a oa eur politiker ruz, eun tamm mad a-eneb ar veleien. Gwarizi a oa ive a berz Luzel. Eun dastumer n'oa ken ; Kermarker a oa aozer, desketoh ha brudetoh dreist-oll.

Med etre daouarn Job Ollivier euz a Landerne e oa danvez rouez war buhez hag oberou Luzel hag a vije bet chomet e kuz pe kollet marteze. An Aotr. Batany a dennas e vad anezo.

N'eur ket evid anaoud deread istor on lennegezh er XIX^e kantved, heb mond da glask sklerijenn en e leor goude beza lennet Buhez hag oberou Ar Gonidec.

Daoust hag e vezo yaouankizou o pennaoui warlarn Kloareg ar Veuzid ? Ma n'ez eus ket, emañ grêt gand or bro.

Lakêt oa bet an Aotr. Batany e penn parrez Sant Vaze Kemper e 1947. Eno e varvas d'an 24 a viz Eost 1955.

Ra vezo Doue laouen ouz e ene !

L. Lok.



skol vrezonég an ao. Batany

e skolach lesneven

An Ao. Batany e-neus roet berz ha brud d'ar henteliou brezoneg bet digoret da genta gand an Ao. Herry e skolach Lesneven, er bloavezh 1923-1924 a gredan. E genteliou o-deus bet levezon a beb seurt war galz tud yaouank d'an ampoent, ha war an hent o-deus kemeret lod anezho goude. Eun nebeudig tud hebken avad a anavez o zro-war-droiou. Tregont vloaz goude, e kredan e heller, hag ez eo poent, skriva ar bajennad kenteliuz-se euz istor an emzao breizeg.

Goude ar brezel 1914-1918, kalz euz ar Vretoned desket bet en emgann ne felle mui dezo gouzañv e vije greet brezel d'o brezoneg e skoliou Breiz-Izel, e-pad m'edo ar Frañs o tivenn gwiriou ar yezioù bihan er broioù o-doa kollet ar brezel. Ha perag n'o-dije ket ar vrezonegerien ive ar gwir da lakaad deski o yez d'o bugale en o skoliou, p'e-noa talvezet o stourm da rei ar gwir-ze da beb seurt poblou all ? Setu ar pezh a lavare peb unan, dreist-oll e gouelioù ar Bleun-Brug.

Nevez eet oan hoaz d'ar skol pa ehanas ar brezel, eur skol vad, med divennet groñs enni komz brezoneg. Ar binijenn, pa vezed tapet, oa rei daou wenneg evid prena bara d'ar heurien. Meur a dro em-eus paeet heb gina, daoust ma n'oa ket an doare wella da zeski ar vugale da rei an aluzenn a youl vad.

Eur wech em-eus nahet groñs paea. Tapet oan bet, en eul leh ma kreden edon va unanig kaer, o soñjal kreñv e brezoneg dre nerz eur zouezadenn, hag ar mestr a-dreñv va hein, tosteet sioul da weled petra 'ree eno an ermit bihan-ze. Nann, ne baefen ket ! Hag e rankis ober tro al leurenn, kroazet va divreh, beb c'hoariadenn beteg fin an devez.

Antronoz vintin, daou wenneg ebed atao ne rofen ! Hag heñvel adarre : tamm c'hoari ebed evidon ! Edom e mezeven, ha biskoaz n'em-oa bet santet ken braz c'hoant da veza, evel ar re all, puchet e disheol ar gwez e bleuñ o hoari kane-tennou.

Pegeid em-eus dalhet penn ? Eur zizun ? Diou zizun ? Ne ouezan mui. Dalhet e vijen bet beteg fin miz Gouere, beteg an ehan-skol. Hag eun devez, evid mond da hoari, em-eus roet va daou wenneg, mezuz ennon va unan, evel ar gwir o plega heb red dirag an nerz, med tommet ouz ar yez ma oan bet gwasket abla-mour dezi. Ha setu perag oun bet e-touez ar re genta a heulias ar henteliou brezoneg kerkent ha ma oent digoret e skolach Lesneven.

Meuleudi an Ao. Batany evel kelenner n'emañ mui da ober. Ken plijuz oa war ar brezoneg eged war beb tachenn all. E genteliou frêz ha dedennuz a zache eun ugent, pôtrig bennag, lod anezho gallegerien hebken, med c'hoant dezo deski yez o zadou koz. Euz istor Breiz e komze deom ive, euz an arzou kaer, an ilizioù ha chapelioù, euz ar hanaouennou ha kontadennoù, euz ar skrivagnerien vrezonég, Lan Inizan, Kermarker, Luzel. Ganeom e teue da bourmen, hag eur wech en em gavet war leh ar bourmenadenn e ree eun displegadenn, selaouet gand muioc'h a dud hoaz eged en e genteliou. Unan bennag euz ar mouezioù kaerra a gane deom son pe verz. Pe ez eem da weled eur chapel, eun iliz, eur maner koz.

An Ao. Perrot, tad ar Bleun-Brug, d'an ampoent kure e Plougerne, a oe pedet da zond da weled pôtréd ar skol vrezonég. Hag em-eus hoaz eun tammig soñj euz e brezegenn war gaerder or yez hag or bro.

Prizioù brezoneg a veze roet da fin ar bloavezh. Evel-se em-eus bet *Ar en deulin*, ha desket ennañ brezoneg Bro-Wened. Evel-se em-eus lennet hag adlen-net ar *Barzaz-Breiz* d'an oad a hwezeg vloaz, er skouerenn a implijan atao abaoe.

Eun evach kreñv ha mezvuz eo ar *Barzaz-Breiz* evid bugale euz an oad-se.

Ha pa gomzan euz levezon al leor-ze war ar re yaouank, dizivenn dirag an touellidigezioù a zo ennañ, e ouezan dre skiant prena petra 'lavaran. Nehet pe digompren e chome va spered dirag brezoneg ar *Barzaz-Breiz*. « N'eo ket souezuz, a zoñjen, gand brezoneg ken koz all ! » Med evel an Aviel e lonken an droidigez halleg, a skoe kement va spered ha va halon hag an notennoù ken abil da ziskouez splann em-oa dirazon skeudenn wirion penna darvoudoù istor Breiz. Ha kement all a dud fur ha desket a gleven oh ober meuleudi al Leor Meur e brezoneg !

E-pad bloavezioù eo bet divrall ha stard va feiz er *Barzaz-Breiz*. Gand va studioù, siwaz, he-deus paket gwall stokajoù. Hag e kavan eo yahuz da va henvroñz beza greet eun hejig d'o hini ive heb an amzer. Med lod euz ar genvroñz en em zifret hag a youh evel bugale pa welont dispaka an nadoz evid eur bikurenn. Ha koulskoude, penaoz divenn « ar gwir a-eneb d'ar bed » war eur seurt diazez ?

Med na plijuz e hell beza gevier kaer da galon an den ! Na dudiu oa d'ar hrennard ma 'z oan beza gourvezet er holo fresk o tañva *Gwin ar Hallaoued*, e kompagnunez *Marzin*, *Lez Breiz* ha *Nominoe*, ha tud veur all euz o hendere ! An dud o-doa kinniget prizioù brezoneg evid skolidi an Ao. Batany o-doa dibabet leorioù kaer evito, sur eo. Piau avad e-noa soñjet er pezh a hellfe diwan e spered, e kalon hag e buhez bugale, goude lenn seurt faltazioù a gemerent evid ar wirionez ? Meur a dro em-eus soñjet er yaouankiz a zo bet ive mezet gand seurt evach e bloavezioù m'oa kalz dañjerusoh beza trellet dirag digouezadennoù kaled ar vuhez.

Ni a oa yaouank en eun amzer eürusoh ! Aliet gand an Ao. Batany, e yeas c'hwel ahanom da Vleun-Brug Gwengamp e 1925. Na dudiusa gouel evidom kaoud an tañva kenta euz kaerder Breiz-Izel, gand gwiskamanchou a liou plahed yaouank a beb korn, gweled evid ar wech kenta lazou-koroll gand bombar da biniou, klevet kaniri kaer e brezoneg, ha displegadennou plijuz ! Soñj am-eus hoaz euz prezegenn entanet ar Yeodet diwar-benn gerioù an Ao. de Monzie, Ministr an Deskadurezh, e-noa nevez disklêriet : « Pour l'unité linguistique de la France, il faut que la langue bretonne disparaisse ! » Ha me soñjal : « Daoust ha n'eo ket evid se eo e vez heskinet ar vugale vihan er skoliou pa gomzont brezoneg ? »

Triweh vloaz goude, em-eus klevet komz adarre euz ar Yeodet. E Antony, eur mignon din ha dezañ, an Ao. Caurel, a ziskouezas din eul lizer nevez resevet digantañ : edod bet o klask terri e zor e kreiz an noz evid dond d'e laza. Ar sparl e-noa harpet. Med pegeid e harpe ? Ha petra eo beva en eur hedall bemdez tenn ar muntre ? Nebeud goude, e klevjom oa bet diskaret ar Yeodet war vord an hent o tond euz interrnamant e vreur. « N'eus forz piau eo ar muntre, a zoñjis, ha n'eus forz petra e-neus greet ar Yeodet, n'eo ket didamall euz e varo kenneheud ar re o-deus goapaet ha gloazet e don o halon ar vrezonegerien kar-o-yez. »

E Gwengamp, e weljom ive pôtréd yaouank hag a oa kalz brud anezho dija, hag a oa bet kemennet deom meur a dro gand an Ao. Batany teuler evez outo ; rag ar zoudard oa bet e-pad seiz vloaz ne blije ket dezañ goapèrèz *Breiz Atao* evid ar vro e-noa sikouret he divenn. Hogen, e korn eur blasenn e Gwengamp e oe kavet or strolladig gand O. Mordrel, prezegez flour evid ar gouerien yaouank ma oam. Ne oem ket gouest d'en em zizober anezañ heb koumananti da *Vreiz Atao*. Evid ugent real. « Petra eo ugent real ? » — « Netra, evel just. » Kuit da gaoud trouz er skolach avad, e rojem on adres en or familhou.

E derou ar bloavezh skol war-lerh, e oe komzet kalz e Lesneven euz ar Bleun-Brug, euz ar prezegennou klevet, ar hanaouennou desket, ar hazetennoù lennet. Ha setu a-nebeudou herv o sevel e-touez ar bôtred war al leur-hoari, hag e-pad ar pourmenadennoù. Dizale e oe laketa nehet ar superior, nehet meur a hini all. Eur ger, eur ganaouenn evel *Dalh soñj o Breiz-Izel* (kanaouenn *Breiz Atao* !), a oa a-walh evid lakaad da zavel eun tabut heb fin. Hag ar *Marseillaise* en dro diouz an tu all evel just !

Eun devez, e oe galvet daou ahanom da gambr ar superior. « Setu, emezañ, ar pezh am-eus resevet evidoh. » Ha diskouez diou skwerenn euz Breiz Atao. An daou a blegas o fenn, hag a astennas lentig o dorn. An dorn all a yeas war e giz. « N'o roin ket deoh. » Selaou a rankjont, avad, eun tammig prezegenn « berr ha touchant. »

Penaoz oa bet dizoloet ar pod ? Eur facteur, skuiz o redek strêjou louz war ar mêz, e-noa kavet difreoh chench diou adres, ha kas Breiz Atao d'ar skolach, e-leh ma kouezas evel eur bodezad eol bero e kreiz an tan.

E gwirionez, an tan-ze a oa krog e meur a leh all en eskopti d'an ampoent, hag an D^r Cornic e-neus displeget kaer ar gudenn en he fezh e Bleun-Brug Landivizio, er bloavez 1954.

E skolach Lesneven, ne helle mui an traou padoud evel-se evid mad ar studio. Hag eur zadornvez da noz a viz Du pe viz Kerzu 1925, digand ar supérieur o tremen da rei notennou ar zizunveziad, e kouezas evel ar gurun war skolidi an Ao. Batany ar helou ne vije mui a genteliou brezonek ; hag urz ive da lakaad fin d'an tabutou war al leur-hoari.

Unan pe unan a zoñjas, e-pad meur a zizun, kuitaad ar skolach. Med evid mond da beleh ? Evid kuitaad Breiz-Izel da viken marteze ? Ar barr arne a dremenas, hag a-nebeudou bihan e teuas ar peoh. Med gouliou kuzet a jomas, hag o-deus merket buhezioù. Evid an droug pe ar vad ? Doue hebken a hell barn.

An Ao. Batany n'e-neus ket bet komprenet mad perag ne oe ket bet ken didrouz ar skol vrezonek er bloavez-se eged diaraog, rag euz e berz en or heñver ne oe chenchet netra, kement ha ma m-eus soñj. Ha ne gontem ket dezañ an tabutou dre ar munud, rag meur a dro ive on-dije bet trouz digantañ.

Kaset eo bet e skol vrezonek da netra gand ar re a grede dezo n'oa nemed o menozioù hag a helle ober labour vad evid Breiz hag he yez, hag a ree euz o gwella evid gounid sperejou ar vrezonegerien kar-o-yez, dreist-oll sperejou ar yaouankiz, dizivenn dirazo. Kerkent e savas enebiezh ken kalet euz an tu all, evid abegou ha n'oant ket oll euz ar henta kennebeud, henn anzañ a ranker. Ha setu tan en ti. Red mad oa e vouga.

N'eo ket bet marvet e kalon an oll. Hag ar pezh a jom euz an tan-ze a dlije beza a-walh evid gweled sklêrroù en amzer da zond, ha pa ne ve nemed evid diwall euz an hevelezh faziou hiviziken.

F. F.



PEDENN KRISTENIEN SINA

Aotrou Doue, a ! aon ' m-eus rag va aon.
Gouest eo da rei din dilezel ahanout.

Aotrou Doue, a ! aon ' m-eus rag va aon,
Gouest eo da rei din
Koll va nerz araog ar fin.

Aotrou Doue, da bedin a ran :
N'am ankounac'h két en da hloar,
Ro din da garantez, hag an nerz
Da rei va buhez evidout. Amen !

(Ecclesia 80, p. 10.)

an aotrou Batany

Morse n'hellin ankounahaad an Ao. Batany. E anavezet em-eus, e-pad pemp bloaz, e skolach Lesneven hag anzañ a rankan eo bet unan euz ar veleien e-neus va merket ar muia evid ar vuhez.

Marvet eo d'an 21 a viz Eost 1955, person e Sant Vaze, e Kemper.

Darempred am-eus bet aliez gantañ, goude ar skolach, ha bepred ma 'z on bet ouz e weled, pe e Kastellin, pe e Montroulez, pe e Kemper, em-eus bet atao en e di eun digemer kalonek ha digantañ eur bern kuzulioù fur diwar-benn peb tra.

Al labour talvoudusa ha pouezusa, a gredan, e Lesneven eo e-neus e hreet, e-giz kelenner. Bloaz on bet eno, en e glas. E vloavez diweza oa : 1938.

Eur gwall zamm e-neus bet war e skoaz evid echui. Ouspenn hanter-kant paotr yaouank e-noa, er bloavez-se, da sturia ha da henchha evid lodenn genta ar « baccalauréat ». Dond a reas a-benn euz e daol, evel kustum, ha da fin ar bloaz ouspenn daou-ugent a dapas o « diplom ». Ar pezh a zo kaerroh, talvoudusoh c'hoaz, tregont ahanom a gemere goude ze hent ar hloerdi braz. Mar deo bet eur helenner dispar, eur mestr skol euz an dibab, eo bet ive ha dreist-oll eur beleg euz ar henta a glaskas dreist peb tra digeri an eneoù evel ar sperejou.

Merka don e-neus greet ar re oll a zo tremenet etre e zaouarn ha garanet eo chomet e peb hini e geennadurezh nerzus ha sklêr.

Soñj am-eus atao, evel ma vije deh, gweled anezañ, beb mintin, o tond warzu e glas, err warnañ, heb selled nag a-gleiz nag a-zehou, eur bern levriou dindan e gazel. Netra nemed ar gwel pe ar skeud anezañ a lakee ar sioulder hag an urz vad da ren dioustu en on touez.

War beb tachenn oa eur blijadur e heuilh : latin, gregach, galleg, relijion. Peb tra a gemere gantañ eur vlazenn disheñvel, rag bez' e-noa an tu da hounid ar halonou evel ar sperejou.

Ral oa dezañ gwaska e vugale. Eur ger, eun taol lagad hebken hag an hini ne 'z ee ket eeun a gemere heb termal e blas.

Bez' e ouie rei buhez d'e glas, sachha on evez war gement tra, heb plega da froudenn hini ebed. Gouest oa, pa gare, da lakaad or halonou da dridal ; da jom seha ha sklaset pa ne 'z ee ket mad an traou ; da veza hegarad ha nerzuz bepred.

Digand peb hini e houlenne ar pezh a helle rei, heb kaout ezomm d'e waska, d'e gastiza.

Gantañ e kemere peb hini ar pleg da lakaad urz e peb tra, da gizella kement labour a roe deom. Reñka a ree e genteliou en eun doare ken sklêr e-unan ma chomem sebezet dirag e ampartiz hag e ouiziegezh.

Pa zave arne en e glas, pa ne 'z ee ket eeun an traou, ne veze ket pell o lakaad ar hounoul da nijal kuit. E berr gomzou, e ouie neuze lakaad peb hini en e blas hag en e reñk. Ral oa dezañ avad mond e kounnar. Red oa neuze deom beza eet dreist ar muzul.

Pa veze red, e kave an tu da rei nerz kalon d'an hini e-noa ezomm ha da rei eun tammig lañs d'ar re en em leze da veza fallgalonet evid tra pe dra. Ne leze morse hini euz e skolidi a-gostez. Goulenn a ree kalz digand ar re genta, nebeutoh, ar pezh a hellent rei, digand ar re ziweza, heb feuka den ebed.

Fizians a gare kaoud en e vugale, med gwaz a ze d'ar re a drompfe anezañ. Buan e teue dezo o skiant prena rag abred e teskent diwar o houst ouz peseurt den o-doa afer.

Pa veze kont reñka eul labour, eur studiaden war al lennegezh dreist-oll, e leze gand peb hini ar frankiz d'he reñka diouz e soñj, gand ma vefe heuliet

ar reolennoù red ha netra ken. Evel ma oa gwall zammet gand an niver deve-riou, e houlenné diganeom lakaad eur groaz war an deveriou, a gave deom, a dalve ar boan-beza reizet strisoh. Neuze e kemere e amzer d'o hwennad, d'o reiz a piz. Med da zivall o-doa ar re a dromple anezañ war an dachenn-ze. Eur wech e rafent, diou wech ne rafent ket, rag gand eur gér pe zaou e ouie rei da gompren dezo gand piou edont er skol.

Gantañ e kemerem boazamanchou mad e-keñver reñka peb labour. Eul labour hanter hreet n'oa nemed eul lastez hini. Peb tra a ranke beza pouezet, eeunet.

Netra nemed ouz e glevet, ouz e weled, e kemerem ar pleg da gas peb labour da benn, e komprenem talvoudegez eul labour greet mad. Bez' e ouie lakaad fouge ha lorh ennom pa veze red, entana or halonou, brouda or sperejou, rei lañs deom dirag kement tra a vire ouzom da vond war-raog. Tenna a ree evi-dom evel mein priziuz euz eur-veñgleuz a freuzem d'e heul, ha mantret ha sebezet e chomem o weled ar pinvidigeziou a zispake dirazom.

A-greiz eur studiaden, e-pad eun droidigez latin pe gregach, enoutiz drezi heh-unan, e lamme diwar eur ger war an amzer a vremañ, evid diskouez deom pegen tost e chome ouzom an dud, an doare beva a wechall. Evel m'e-noa beajet kalz, redet dre amañ a-hont, gwelet broiou hanternoz Europa, ar Grèce, an Douar Santel, e tispake dirazom, en eun doare disheñvel, dremm peb bro. Digor oa e spered ouspenn war beb tra, eur bern traou oa sanailhet en e benn, hag e poent hag en amzer e roe deom tro da ledannet or gouiziegez. Netra ne jome euz e zilerh e-touez oll arzou ar bed : yez, sonerez, lennegez, ti-saverez, istor. Peb tra a zervije dezañ evid digeri hent ar spered hag ar galon.

Pa gomze deom diwar-benn al lennegez, oa eun dudi e glevet. Squa a reem e gomzou ha klevet e vefe bet eur gelienenn o nijal pa stage da gomz euz e skrivagnerien garet : Racine, Corneille, La Fontaine, Homère. An amzer neuze a dremene huan ha morse ne skuizem gantañ.

Bez' e kave an dro ive da gomz deom euz skrivagnerien Vreiz, euz La Ville-marqué, Calloc'h, Luzel, Brizeux, euz kaerder or bro, euz istor Breiz, euz e labour war dachenn ar brezoneg.

Calloc'h dreist-oll a blijde dezañ. Keñver gand Racine hag Homère e lakee anezañ hag eur blijadur oa e zelaou pa stage da gomz diwar-benn barz Enez Groe ha pa lenne deom pennadoù euz e varzonegou.

Eur helenner dispar eo bet an Aotrou Batany, eur helenner a glaskas da genta digeri ar spered, stumma ar galon en eur rei da zantoud ar saour a hel-lem paka ha tenna euz skianchou ar bed.

Kelenner eo bet, beleg eo bet ive. Morse n'e-neus henn ankounac'haet ha gouzoud e-neus greet atao rei da gompren deom n'eo nemed eul lastez den an hini a gont hebken war e spered ha war e ouiziegez. Ene, kalon ha spered, setu an den en bez, ar pezh e-neus klasket digeri, tresa e peb paotr yaouank bet fiziet ennañ, hag e labour, doucfañs ebed, a zo bet benniget gand an Ao'rou-Doue.

J. Seite.



eun nebeud envorennoù euz eur bloaz skol gand an ao. Batany

Araog miz Here 1931 e anaien an Aotrou Batany. Tro am oa bet d'e weled aliez, atao tiz warnañ, o vond hag o tond dre borzioù ha skalierou Skolaj Lesneven.

D'ar mare-ze eh en em gavis en e glas, gand plijadur a lavaran dioustu. An Ao. Batany e-noa brud da veza eur mestr-skol euz an dibab ; hag em-boas mall, gand an tri-ugent kanfard a oa ganin, da weled ha gouest oa d'ober enor d'e vrud.

D'an eur e veze atao. Ni a veze reñket mad, daou ha daou, dirag an nor. Ne ree morse sin da vond er hlas araog an eur ; med pa veze echu ar skol ne chome ket eur vinutenn pelloh kennebeud. Mond ha dond a ree en or hichen, e leoriou en eur zah lèr dindan e gazel, e zaoulagad lemm o luia a-dreñv e lunedou.

En dervez kenta, lavaret ar bedenn, eh azezas a-dreñv e vuro hag e lavaras deom, en eur dremen buan e deod war e vuzellou : « Mes p'tits agneaux ! sou-venez-vous que vous êtes pour un an entre mes griffes ! » Hag e tispake e vizied en eur vousehoarzin. Goude e krogas gand e labour, en eur zisplega deom e zoare d'en em gemer evid planta eun tammig pouez en or pennou-skañv : peadra da veza barreg d'ober on treuz war an douar heb kaoud mez nag euz on deskadurez nag euz or relijion. Rei a reas deom eur bern kuzulioù kuit da goll amzer, nag on hini nag e hini. Ni her selaoue : grik ebed, m'henn asur deoh ! N'oa ket ar poent, rag mar doa lemm e lagad, e deod a oa ive dis-tagellet mad, ha buan e kave ar ger just da lakad, brao ha kempenn, peb hini en e blas, heb morse beza flemmuz.

Ar hentelioù a rañke beza gouezet, evel just. Ha gouezet e vezent peurlïesa, rag n'oa ket tener evid an dud lezireg. Galleg, gresianeg, latin, katekiz : ampart oa war bep tra. Ha bez' e-noa an tu da ziruostla Virgile, Cicéron, Homère, Racine, Corneille, ha me oar me c'hoaz ! kerkoulz ha da zisplega splañ gwirioneziou ar Relijion. N'oa ket braz e vent, med e spered hag e ouiziegez a oa dreist !

Meur a dro am-eus e welet o tond er hlas gand e benn droug. Dioustu e veze remerket, rag n'oa ket evid kuzad e zantimañchou. Neuze e reem eur zell an eil ouz egile en eur zoñjal : « Bremaig e vezo fan ! » Eur wech, or-boas klas- ket lakad du war wenn or menoziou diwar-benn diou pe deir frazenn, tennet euz « Pensées » Pascal. Setu aze unan hag a vije bet gwelloh dezañ displega frêsoh e « Pensées » evid brasa mad bugale ar skolajou !... Evid lavared gwir, torret or-boas or pennou diboell epad meur a eurvez, med en aner. Ar surveillant a oa er studi vraz d'ar mare-ze, n'e-neus ket bet amzer da lakad e zaoulagad en e hodellou, en dervez-se ! Teir, peder bajennad hepken ! ha c'hoaz gand pègement a boan. Eun druez ! Setu petra 'erruas : ne roas notenn da zen ebed, med pebez sarmon !...

Eur wech all, or-boas eur pennad euz « Aristophane » da drei e galleg. Siwaz ! An dever gwella en-devoe 2 war 20 ! Goude ar bedenn e lavaras deom : « Mes p'tits agneaux ! J'ai une bonne nouvelle à vous apprendre : vous êtes tous une bande de nouilles ! Untel : 0... Untel : 0... Untel : 1/2... 1/2, Messieurs !... » Ha goude e roas deom an droidigez vad.

Evidoun va unan, am-eus bet grêt gwelloh anaoudegez gantañ diwar goust eun dever diwar-benn Chateaubriand. Galvet e oen en e gambr. Kaoud a ree din edon o vond da veza sarmonet. Med, nann. « Plijadur az-peus grêt din, eme-zañ din, te, da vilhanna, a gompren ez eo Chateaubriand eur Breizad ! » Souezet

braz oan. Hag e tisklerias din e zoñj war ar Brezoneg. Ma karen ar brezoneg araog; eñ e-neus grêt din e gared muioh hag e studia gwelloh. Epad ar vakañ-sou e roas din da lenn leoriou brezoneg pe halleg diwar-benn Breiz : Barzaz-Breiz, Kontadennoù Luzel, Gwalarn, Feiz ha Breiz, Anatole Le Bras, ha me oar !

Labourad on-eus grêt epad ar bloaz gand an Ao. Batany. Plijadur on-eus bet gantañ. Ne zamante ket d'e boan e-unan. Beb sizun e-noa tost da zaou hant dever da zifazia, heb konta e brezegennou, e gonferañsou, atao plijuz. Gouzoud a ree oa mad c'hoarzin beb ar mare, hag eur wech ar zizun, da beder eur nemed kart, e sarre e leoriou evid goulenn : « Alors, quoi de neuf en ville ? » Atao e veze kavet eun dra bennag farsuz da gonta dezañ, ha ne vanke morse da rei deom eur gentel dalvouduz. Ouspenn-se, bep sadorn, e lenne deom, epad eur hart eur : « Les aventures du Mouron Rouge ». Eur blijadur oa selaou eur pennad lennet gand an Ao. Batany.

Ouspenn ober ahanom tud desket, e vrasa aked oa ober ahanom paotred yaouank kristen.

Pa zoñjan en Ao. Batany, e welan eur beleg santel, speredeg ha gouizieg braz, eul labourer euz ar henta, eur mestr-skol euz an dibab hag eur Breizad a gare e vro. Ha fiziañs am-eus eo bet degemeret mad e baradoz an Aotrou Doue gand oll zent koz Breiz-Izel.

Unan bet gantañ er skol.

goulennit raktal digand :

« Fondation Culturelle Bretonne »

Boîte Postale 17, Brest, C.C.P. 380.96 Rennes :

LEXIQUE BRETON-FRANÇAIS et FRANÇAIS-BRETON
(Stephan-Seite), 330 francs, franco.

L'ORTHOGRAPHE UNIVERSITAIRE de la LANGUE BRETONNE
(Falc'hun-Dujardin), 180 francs, franco.

KOMZOM, LENNOM, HA SKRIVOM BREZONEG
(D' Tricoire), 280 francs, franço.

MOJENNOU AR MOR (Pierre Helias)
éditions Jos Le Doare, 280 francs franco.

la chanoine Batany au travail : sa Bibliothèque

(actuellement à Kerbénéat)

Ce n'est pas sans une véritable émotion qu'au contact de ces livres et revues, soigneusement rangés, reliés bien pauvrement parfois mais toujours si proprement, avec souvent de discrètes et précises annotations, on retrouve singulièrement vivante cette physionomie de grand travailleur, érudit et critique avertis, et surtout prêtre de chez nous soucieux de l'avenir spirituel de sa Bretagne.

Sa bibliothèque est avant tout un instrument de travail en « matière de Bretagne », particulièrement apprécié par ceux qu'il accueillait si libéralement. Non pas qu'il possédât des éditions rares — le chanoine Batany n'était pas un bibliophile —, mais il avait constitué, peu à peu, avec l'aide de son frère, l'abbé Auguste Batany, surtout à partir de 1920, un ensemble breton assez étendu et bien fourni dans presque tous les domaines, et qui ne représente d'ailleurs qu'une partie de sa bibliothèque générale.

Le fond de littérature est, de beaucoup, le plus important : nous sommes chez un professeur d'humanités — *il avait même préparé un cours de littérature bretonne qui mériterait d'être imprimé : théâtre, contes, prose et poésie, grammaires et dictionnaires : toutes les réalisations de la langue bretonne avec nombre d'œuvres modernes en français.* Mais les ouvrages de piété, tout compte fait, occupent presque autant de place, depuis les multiples opuscules de Le Brix et de ses émules jusqu'aux récentes traductions de la Bible, en passant par les catéchismes et surtout les Buhez ar Zent. On remarquera la part notable que tient le dialecte de Vannes que le regretté celtisant avait spécialement étudié, de même qu'il s'était initié au Gallois. Si les monuments, les Histoires de Bretagne d'avant la Révolution sont presque totalement absentes, il ne manque aucune des éditions modernes si variées. Notons cependant la rareté des livres et revues d'archéologie : M. Batany ne pouvait s'intéresser à nos vieux monuments que dans la mesure où ils révèlent l'âme profonde de la race bretonne ou apportent des témoignages concrets sur la spiritualité de nos pères dans la foi.

Ce qui montre, en effet, l'esprit qui animait cette âme de prêtre breton au cœur fervent, épris d'enthousiasme, ce sont ces innombrables notes qui constituent le plus précieux du legs qu'il nous a laissé. Ecrites le plus souvent au dos de copies d'écoliers, vouées ainsi à une survie flatteuse, élaborées en sujets de conférences au plan méthodique ou d'articles dont nous donnons par ailleurs la liste, sans doute incomplète, elles se groupent autour de trois centres d'attraction principaux : littérature, histoire, hagiographie, plus précisément cette spiritualité des saints bretons des premiers siècles à laquelle, ces dernières années, il revenait sans cesse.

Quelques noms émergent de cet ensemble aux aspects multiples : somme's de la littérature bretonne, Luzel, et par bon voisinage Anatole Le Bras, mais surtout La Villemarqué et son *Barzaz-Breiz* ; c'est ce dernier sujet qui occupe la curieuse correspondance de M. Batany avec Ollivier, l'érudit auteur de la *Chanson Populaire*, en feuilles volantes, qui, avec M. Le Roux, le professeur de l'Université de Rennes, l'aida efficacement et le soutint dans la préparation de sa thèse de doctorat sur Luzel. Sur le plan de l'hagiographie, c'est Landévennec qui est le centre d'intérêt ; l'annonce de la restauration de l'antique abbaye de saint Guénolé fut la grande consolation de ce pasteur d'âmes pénétré de l'esprit de la Bretagne chrétienne à ses origines.

C'est pourquoi, les moines de Kerbénéat ont tenu à faire l'acquisition de cette bibliothèque pour le fonds breton qu'ils espèrent, avec l'aide de tant de bonnes volontés, constituer à Landévennec.

R. P. Grégoire, de Landévennec.

ARTICLES DIVERS DE M. BATANY

Dans l'**Armorica** de 1925 :

Claude Laporte (et sujets divers : Atlas linguistique de M. Le Roux ; Merzarnou et Occismor ; la Torture autrefois ; Cardinal de Coëtivy ; Le Breton au baccalauréat ?)

Kaierou Kristen : gand Kloareg ar Veuzit.

Kaier Kenta : An danvez marzerez e kontadennoù an Uhel 1945.

Kaier 3 : 1946 : Pascal Kerenveler.

Bleun-Brug (Genver 1951) : Sant Budog.

Pax : Octobre 1950, l'abbaye S. Guénolé de Landévennec.

Pour la Presse suisse, 18 Avril 1953 :

Bretagne pays des Pardons : Témoignage chrétien dans le Finistère.

Dans le **Sentier**, Chronique bretonne (1948-1955) :

Hagiographie bretonne ; Panorama de littérature bretonne ; Morceaux choisis : an Aotrou Nann et Mort de Pontcallee ; Littérature folklorique bretonne (Souvestre et Madame de Saint-Prix) ; La Villemarqué ; Luzel, le Barzaz-Breiz ; J.-P. Calloc'h ; les contes de Luzel (quatre articles) ; Essai de commentaire d'un Poème du Barzaz-Breiz : Itron Varia r Polgoat ; Un poème de J.-P. Calloc'h : Fiat ; Le Poète comique Claude Le Lae ; Histoire locale et Culture Chrétienne et Bretonne : Kerdevot, Tremenvan an Ytron Guerc'hès Maria ; De Plas ar c'horn à St-Lazare : la Jeune Captive ; Une Histoire de tabatière (Paul 1^{er} et l'abbé Lharidon de Pengilly).

LISTES DES CONFÉRENCES

I. Sur l'Hagiographie.

Tro-Breiz : Mai 1947 ou 1948 ?

Troménie de Locronan : 15 Juillet 1947 : Hagiographie bretonne.

Skol-hany Rosko : 12-13 Août 1947 : la Spiritualité bretonne d'après l'Hagiographie des V^e-VI^e siècles.

Bleun-Brug de Saint-Pol, Août 1950 : les Hagiographes.

Retraite du Comité du Bleun-Brug à Kerhénec, Novembre 1950 : La Spiritualité de nos saints bretons.

II. Sur la littérature bretonne.

Bleun-Brug de Lesneven : la prosodie bretonne 1928.

Bleun-Brug de Douarnenez : ar Brezoneg er Skoliou 1929.

Bleun-Brug de Guingamp 1930 : La Poésie Bretonne.

Conférence sur la Poésie Bretonne à Lesneven au Cercle d'Etudes des jeunes filles en 1930.

Même sujet à la Salle des Arts de Saint-Louis de Brest en 1930.

Conférence à Plouescat, le 26 Novembre 1933, sur les Contes bretons recueillis par Luzel.

Non datées :

Série de conférences au Cercle Saint-Gildas du Collège de Lesneven sur la Langue, la Littérature, l'Art religieux, l'Art profane, l'Histoire, le Mouvement breton.

Au Calvaire de Landerneau : sur le Mouvement religieux et le Romantisme : Lamennais, et sur l'histoire et la critique religieuse au XX^e siècle : Renan.

A l'Ecole du Sacré-Cœur de Lesneven : Renan, souvenirs d'enfance.

Le Polgoat : Guide pour un rhétoricien.

Cours de littérature bretonne (projet ?)

Non localisées : Causeries sur l'Histoire de Bretagne 1924-1925 (Lesneven ?)

Octobre 1951 : Causeries d'initiation à la Culture bretonne : la Langue.

Conférences sur le « Barzaz-Breiz » :

à Saint-Pierre-Quilbignon, en Janvier 1934 ;

à l'Ecole Notre-Dame de Lourdes de Lesneven, Septembre 1937 ;

au Bleun-Brug de Locronan, en Août 1949.

Conférences sur les Folkloristes :

à Paris — Ker-Vreiz, le 8 Novembre 1942 : les Folkloristes bretons au XIX^e siècle.

Même sujet : 2 Décembre 1942 : Kaozeadenn dre skingomz Roazon-Breiz.

Dernière conférence de M. Batany :

La Ville d'Is a-t-elle existé ? (journée d'amitié du Bleun-Brug, Douarnenez, 27-3-55).

Nombreuses conférences sur la littérature bretonne faites dans les collèges de Basse-Bretagne aux enseignantes et enseignants chrétiens.

Conférences sur le Conte breton aux journées de formation Bleun-Brug de Brest, Mars 1952.

Hagiographie bretonne, par P. Batany, publiée dans « Bleun-Brug » ;

Sant Budog, n° 1, Janvier 1951.

Eur familh sent : Sant n° 39-40, Gouere-Eost 1951.

Sant Brevaler, n° 50, Mezeven 1952.

Santez Tréfina, n° 57, Meurz 1953.



e katalonia

Katalonia a zo eur rann-vro euz Bro-Spagn ; ar gêr henn eo Barselon. E niverenn Gwengolo, ar gelaouenn « *Esprit* » a gomz deom euz ar vro-ze.

6 milion a dud a zo ; ar yez a zo eur seurd romaneg disheñvel euz ar spagnoleg.

Er bloavezh 1936 e veze embannet, netra nemed e Barselon, nao gazetenn pemdezieg e Katalaneg hag er peur-rest euz ar vro 14 all ! Kelaouennoù all ha kelaouennouigoù, 1.400 anezo ! Teir droïdigez euz ar Vibl a oa war ar stêrn, unan anezo aozet gand meneh Montserrat, ken kaer hag an droïdigeziou galleg a anavezom nevez 'zo. Troïdigeziou euz ar gwella skrivagnerien latin ha gresianeg a oa embannet. 50 levr anezo — n'o-deus ket o'far e spagnoleg. Nevez 'zo eo bet aotreet kenderhel gand an embannadurioù-ze.

Er bloavezh 1939 Katalonia a gollas he frankiz hag a oe staget ouz Bro Spagn. Distrujet e oe an oll levrou katalaneg a oe en tiez-moullêrez pe er stalioù-levrioù ; divenn groñz a oe da voulla netra e Katalaneg, paperioù dister zoken evel mortuajou pe kouviadennoù d'an eureujou. Ar re a zizente a veze toull-bahet.

Er bloavezh 1946 e oe aotreet endro moulla leorioù e Katalaneg, n'eo ket avad na n'eus forz pere na forz pegement. Bremañ hoaz eo striz an urz war ar poent-se. A-hent-all na kazetenn na kelaouenn.

Gêr Katalaneg ebed er radio, nag er sinema, nag en embannadurez, nag war an afichou, follennou...

N'eo ket maro koulskoude spered Katalonia e Katalaniz hag o c'hoant a vefe kaoud muioh a 'frankiz ha labourad, asamblez gand ar rann-vroioù all evid brasa mad Bro Spagn a-bez.

Ha ni Bretoned, frankiz deom da voulla, n'om ket gouest da zerhel en e zav eun nebeud Kelaouennigoù ! Ne vo ket saveteet ar brezoneg en desped d'ar Vretoned !



An aotrou Batany, etre an Aotrounez Mocaer ha Yeun ar Gow,
e skol-hañv Rosko, e 1947.

Gweled a reer c'hoaz war ar skeudenn : V. Seité, Levot-Becot, eur Bask, hag E. Mocaer

an aotrou Batany ha skol-hañv rosko e 1947

Skol-hañv Kastell-Paol warlene, eo bet an eil skol-hañv savet evid ar vistri-skol kristen.

An hini genta, nebeutoh anavezet, a oa bet savet e 1947, gand ar *Skol-dre-Lizer*, renet gand *Visant Seite*, d'ar mare-se rener-Skol e Rozko.

Kinniget e oa bet deom, evid ar skol-hañv-se, eur henkiz kaer, tre war lez ar mor, gand leanezed ar Spered-Santel. Padoud a reas euz an 11 d'an 23 a viz Eost.

Eun 70 bennag a skolidi, a dremenas dre skol-hañv Rozko hag a lezas o zinatur war gajer a enor ar skol. Eun 40 bennag a vistri-skol a heuilhas anezi penn-da-benn.

Prezegerien e-leiz a oe kavet : an Aotrounez *Falc'hun* (Kloerdi-Kemper), *Loeiz ar Floc'h*, *Dujardin*, *Riou*, *Job Seite*, *Louis Seite*, *V. Seite*, *Colleau*, *Saig ar Gow*, *Y. ar Gow*, *Stephan*, *Jacob*, *Breton*, *Guivarc'h* (Rozko), *Nedelec*, *Mocaer*, *Uguen*, *Jos Doare*, *Mévellec*, ar *Minor*, an Tad *Eujen* hag an Ao. *Batany*.

Méd an hini a roas pouez d'ar skol-hañv-se, an hini a oe, evel pa lavarfen, ene ar skol-hañv-se, eo an Ao. *Batany*.

Diou wech bemdez e komize deom : a-raog an overenn, euz *Speredelez* or *Zent kôz* ha da 10 h. 1/4 euz on *lennegez vrezoneg*.

An Ao. *Batany*, euz gouenn ar gelennerien, a zo bet e-doug e vuhez penn-da-benn, eur helenner dispar. En e vleud en em gave bepred dirag skolidi.



Skol-hañv Rozko, a zo bet evid an Ao. *Batany* unan euz brasa levezeg e vuhez. Peb tra e-noa greet evid he has da vad. *Bernadet*, e vatez, eo a reas ar gegin, war e gont, hag evid bennoz Doue, sikouret mad, red eo henn anzav, gand eur plah ken kaloneg all : *Monig Seite*.

Felloud a reas dezañ, gand nerz, lakaad da ziskenn en on eneo, kenteliou, aliou ha skweriou or zent koz, ar re a zavas or Breiz hag a reas euz or bro, eur vro gristen.

Gantañ on eus prederiet war doare santelez Sent Breiz, ha gweled, en deiz a hirio, penaoz tenna or mad euz o skweriou.

* Hag e lavare deom :

« Or meneg koz, en o manatiou braz, a veve unanet. Eveldo, gouezom en em houzañv ha kenlabourad evid gloar Doue ha bugale Vreiz.

« Or zent koz en em denne e sioulder ar hoajou pe ar mor, evid beza tosiou da Zoue. Eveldo, klaskom bepred tostaad ouz Doue, beva e Doue hag evid Doue, izel a galon ha distag diouz madou ar béd.

« Ebestel greduz eo bet or zent koz. Evid gounid eneo d'Or Zalver, o-deus kerzet dre an oll vroioù keltieg ha dre an Europ a-béz. Ar zent eo o-deus urziet ar Vretoned divroet ha savet evito or parrezioù. Kelennerien genta or pobl eo bet ar Zent : deom-ni, kelennerien ive, da vale war o roudou.

« Karet o-deus Or Zent koz, kaerderiou an natur : oberou Doue. Evid o manatiou o-deus klasket al lehiou kaerra : Landevenneg, Lok-Maze-penn-ar-béd... Karet o-deus ar mor ; karet o-deus ar hoajou, ar sterioù... Eveldo, lakom or bugale da zizelei Doue e kaerderiou or bro.

« Burzuduz, leun a vuzudou eo bet buhez Or Zent koz. Gras Doue, ma lezom anezi, a raio ive burzudou kaer en on eneo.

« Kaled kenañ eo bet pinijennou Or Zent koz. Evel-se int deuet da veza mestr d'o horv. Doue ne houlenn ket diganeom kemend-all. Méd gouezom gouzañv or poaniou pemdezieg er memez spered a binijenn.

« Braz eo bet glanded Or Zent koz. Sant Tenenan, dezañ eun dremm gaer a baotr yaouank a houlennas digand Doue beza-lor evid dezañ chom hep dimezi. Evid diarbenn an tentasionou vil, greom pinijenn, bezom izeleg, labourom, ha karom Doue.

« Karantez Doue ha karantez an nesa a rene Or Zent koz. Kredom, ni ive, er garantez hag he lakom da darza en-dro deom dre gomzou ha dre oberou.

« Tud a bedenn eo bet Or Zent koz : pedi a reent en deiz ha pedi a reent en noz. Pedenn an Iliz a oa o 'fedenn veur. Karom evedo ar bedenn. Goulenom sikour ar Zent evidom hag evid Breiz.

« N'eus ket a wir verzerien e-touez Or Zent koz. Ne sponte ket ar re-mañ dirag an Ankou. Gouezet o-deus rei d'or hentadoù eun doujañs vraz evid ar maro. En em zistagom diouz traou ar béd-mañ evid deom mond êseh da levez Doue.

« War an douar o-deus Or Zent koz diskouezet deom an hent. Er Baradoz e pedont evidom Lennom ha studiom piz o buhez. Kerzom war hent an Neñv, on daoulagad o para warno, daou vil anezo. Euz or gouenn int. Pedom anezo evid Breiz, méd dreist-oll deskom diganto skiant a zantelez. »



Bet eo an Ao. *Batany*, abostol braz Or Zent koz. Studiet e-noa piz kenañ o buhez. Plijoud a ree dezañ mond d'ar pardonioù da brezeg diwarbenno. Savet e-noa eur ficheneg war oll Zent Breiz warno kement diskleriadur e-noa gellet kaoud. Evid *Bleun-Brug* ar Zent e Kastell-Paol e 1950, e-noa laket tresa eur gartenn Vreiz warni kement roud e-neus bet kavet war Sent Breiz : ilizou, chapelioù, kalvarioù...

Levraoueg an Ao. *Batany* a zo hirio e Landevenneg, dre vadelez *Bernadet*, e vatez hegarad. Enni, an neb a gar a hello kavoud sklêrijenn diwarbenn Sent or bro.

RUZ, BIOH KERGENGAR

Va mamm a zimezas eil tro. Nag a fouge a oa ennon o vond da friko va mamm ! C'hwil, ar halz ahanoh, n'oh ket bet e friko hoh hini. Eur mañsoner oa heh eil gwaz, eur mañsoner fur ha mad.

Me a yeas gand va mamm ha gand va zad da jom en eun ti-soul e Kerivinog, e-kichen ti Yann Dirle gwechall.

*P'edon war bont an Noaned, ge,
Yann Dirle,
war ar pont o ouela,
Mari Herri, Mari Herri,
war ar pont, o ouela,
Mari Herri, « du tabac ! »*

Eno e oa tro da zerhel diou vloh. Med n'em-eus dalhet tamm soñj ebed anezo ! Nag euz saout all Kerivinog kennebeud ! Eo, eun tammig skeud a zalhan euz saout koz, maro an tri balevarz kenta anezo e ti ar Penneg, e ti Pèr ar Holin, e ti Bi Jakez. Hag hini Biel ar Vorel 'ta ! Hounnez a oa kosoh hoaz hag he-doa beh o vond a-raog ! O gweled a ran o klask treuzi ar poul-lad dour, braz evel eul lenn, a stanke ar straed e-kichen ti an Neinel : eur wech pe ziou e oa ranket klask kezeg d'o zenna kuit, med netra a-hend-all.

Eur vloh a zo eur vloh, a lavaro lod. Anaoud a rit istor person Landivizio.

Eno e oa person koz koz, eun den santel a-hend-all. Da fin e zevez e veze skuiz-mar, med goude koan, e ranket lenn bemdez, er presbital. « Buhez ar Zent ». Ar person koz a zerre e zaoulagad. Unan euz e aihoned a gureed a lavare e kouske, egile a lavare e vorede hebken. « Gwelet e vo », eme ar henta. Hag eñ, eur pardaez hañv, kemer al levr braz er zal, e-leh ma teue ive Mai-Jann, ar plah, evid ar grasou. En em lakaad a reas da lenn buhez sant Pivrig. « Ar sant-mañ a oe ganet e Landivizio. E vamm a oa tort hag e dad a oa hanter luch. E hoar a oa, evel kalz a verhed en amzer-vremañ, klañv gand ar c'hoant dimezi... » Hag an istor a gendalhe evel-se war an heveleb ton betek ar penn.

En eur walhi an traou er guzun, e lavaras Mari-Jann d'he ferson : « Setu aze eur sant drol avad a zo hirio, Aotrou Person ». — « Hola ! hola ! eme ar person, eur sant drol ? eur sant drol ? Ar zent a zo oll heñvel, heñvel, Mari-Jann ! »

Ar zent n'int ket oll heñvel, dre hras Doue, nag ar saout kennebeut. Ha ma ne blijas ket din saout Kerivinog, oa dre ma n'o-doa netra da blijoud evel

*« merhed yaouank koz diazezet
ne hoarz mui den ouz o gweled ».*

An ti-soul a oe gwerzet, ha d'an ampoent e helled lakaad an dud er-mêz e-giz-se. C'hwil miz a-raog, e veze degaset an urcher, lakaet ar paper gwer-zidigez war an nor. Ha da ouel Mikêl, an dud er-mêz dindan ar hohi da loja gand o bugale ma karent.

Lezennou nevez a zo bet greet abaoe evid divenn ar paourkêz tudou. Ar paour, gwechall, a veze greet ar pez a gared dezañ. Ar re o-doa arhant a rene an traou hervez o faltazi ! Lod a lavar : « Gwechall an dra-mañ ! Gwechall an dra-hont ! » Gwechall ar paour a laboure evid ar pinvidig. Pa glañve, pa deue da veza koz, e veze lezet, koulz lavared, e foz an hent braz, evel eur hi.

Hirio eo esoh beva. Ar paour, ma lak e youl, a deuio d'en em zével. War e daol ne vo ket mui bep pred patatez krohenn-digrohenn ha lêz tourgouilh.

Nann, eun tamm ragoud bemdez hag eur banne gwin mad gantañ na deuont ket da re gêr dezañ hirio !

O n'eo ket ar paour a ouelo d'an amzer a wechall ! Hirio a zo gwelloc'h eged deh, lia warhoaz e vezo gwelloc'h hoaz eged hirio !

Va mamm ne jomas ket da dorta. Prenna a reas eun ti bihan e Kergengar, ha dizale goude, eur park, e traoñ ar gêriadenn. Eur vloh a brenas ive, unan goz eun tammig, euz a Gerhrah, e Sant-Pabu. E Sant-Pabu ez eus saout hag a zo savet mad. Lod zoken a oar c'hoari foot-bâll, med an dra-mañ zo eun istor all. Ruz a oa eur vloh dreist, leun a lêz a oa ganti, hag ouspenn deg lur amann er zizun ! Eur gwir deñzor evid eun tiegez bihan.

Med n'eo ket gand eur park hebken eo e heller maga eur vloh. Penaoz ober ?

Klevet em-eus gwechall istor Yann. Eñ ive evid maga e familh e-noa prenet eur vloh. Med, gwasoh hoaz, n'e-noa ket eur meutad douar d'he strapenna. Eun aotrou a oa e-kichen en eur maner. Hennez avad ne ziouere netra dezañ. Muioh a zaout e-noa eged Marharid Sandrione ha douar boued chatal forz pegement.

Red eo d'ar paour beva, petra 'fell deoh ? Yann a lakee bemdez e vloh en eur parkad melchen d'an otrou. Hemañ a oa eur chaseour. Ar re o-deus mevilli da ober o labour a hell mond da bourmen, e-pad ma vez re all o leunia o yalhou. O weled peuret e velchen meur a zevez diouz reñk e soñjas : « Foulte ! Foulte ! nag a hedon ! » Dond a reas gand e fuzuilh hag e welas bioh Yann ! Droug a yeas ennañ. Mond a reas da gas ar vloh d'ar gêr, ined e-leh kemer truez, e lavaras da Yann :

— Ma welan da vloh eur wech all e va 'fark, m'he lazo !

Al laboused koz, pa glevont o re vihan ouz o gervel hag o lavared o-deus naon, ne varhatont ket evid mond da laerez boued dezo e parkeier ar re all, peogwir n'o-deus tamm douar leve ebed dezo, o-unan.

Yann e-noa bugale hag o-doa naon. Ma ne vije ket bet mui a lêz gand ar vloh, penaoz e-nije greet evid o maga ? Kas a reas adarre e vloh da laerez e park an aotrou he lazaz gand eun taol fuzuilh.

« Gagn fall a zo anezañ ! a zoñjas Yann. Kousta kër a ray d'e lèr ! »

An aotrou, evel kalz tud leun o godellou a arhant, n'e-noa tamm spered ebed da werza.

Yann a lakaas leun a dud da dremen hebiou d'e vaner gand sier leun a golo.

An aotrou a oe lakeet nehet maro. Dond a reas en-dro da di Yann :

— Ha ! eme hemañ dioustu, bennoz deoh, aotrou ! Na pebez taol kaer ho-peus greet din ! Ne ouezin dare bremaig petra ober gand va arhant. Ranket em-eus klask va oll vignoned evid va sikour da zigas an teñzor d'ar gêr ! Me n'oun dare petra zo a-nevez, med krehin ar saout a zo eet er-mêz a briz : pemp skoued ar vlevenn deh e Lokronan ! Emberr ez eus koan vraz amañ. Chomit ive, aotrou !

— Foulte ! Foulte ! n'em-eus ket amzer.

Hag an aotrou d'ar red tan d'ar gêr, kregi en eur morzol ha laza oll e zaout.

Istor ar paour a zo deuot a-nebeudou, dre e ijin, hag e finesaou, d'en em zizober euz ar sklavaj a wechall, da gemer perz d'e dro er pinvidigeziou hadet gand an Aotrou Doue dre ar bed evid mad an oll.

Va mamm ne zoñje ket beva he bioh gand traou ar re all, nann ! Med war-dro Kergengar ez eus leun a straejou ha peuri a zo enno. Mond a raje da ziwall he bioh alhan m'he-dije kavet douar all da brena pe da fermi. Ne veze lakeet nehet gand netra, a welit.

Lod a jom da dorta. Me 'm-eus klevet istor unan euz a Landeda a oa o vond da zimezi gand eur plah yaouank euz a Zant-Pabu. Deiz ar weladenn, e teuas gand e dad, e vamm, e dad-koz, e vamm-goz, e hoarezed, e vreudeur.

Bag an treizer a renkas ober seiz tro evid o herhad. P'edod o vond ouz taol, unan goz euz a Landeda hag a veze aliez mezvez a lavaras e ranke kaoud dour da eva. E Sant-Pabu eo ral e ve lakeet dour war an daol, dreist-oll deiz eur weladenn, ha ne oa ket a zour en ti ! Re gal ! « Piou a yelo d'ar feunteun ? » a lavaras Mari. Ar paotr-nevez, c'hoant dezañ ober plijadur d'an hini a oa war-nêz beza e vamm-gaer, a yeas d'ar red tan, divotou ha diloerou, da gerhed dour gand ar zailh da Vrezehenn ! Med kaer oa gedat, ne deue ket en-dro, hag an dud, ar plah-nevez dreist-oll, êz eo deoh gouzoud, a oa nehet maro !

Job a yeas da weled e pe leh e oa chomet, hag e kavas an hini a oa o vond da veza e vab-kaer... o skrabad e benn, azezet harp er feunteun.

— Petra 'zo ? eme Job.

— Petra 'zo ? eme baotr Landeda. Me 'zo o soñjal hag e rankan soñjal peseurt ano a lakin da va bugale, ma 'm-bevez !

— Euz va merh din me da vihanha, n'az-peus ket a vugale da gaoud, leue a zo ahanout !

Hag e oe freuz-taol. Mari daou viz goude a zimezas gand unan euz a Wital-meze ha n'oa tamm finnoh.

Gwelloh eo an dud a ya war-raog bepred, heb selled a-dreñv o hein.

Ruz a deuas da veza lard pillh gand peuri ar straejou. Eur vloh vad oa, med, heb an amzer, e veze strobinellet. Me 'gave din, er penn kenta, eun naer eo a deue da zena Ruz er park ha da lakaad da dorgoilha he lêz.

Nann, ar strobinelou oa ! Me 'gave din ive ne oa ket mui ! Eo; hiniennou hag a rede en noz war-dro Toull al lern hag ar Vilin-nevez, nann a-vanden-nadou evel gwechall, med daou ha daou, ar strobinelou-ze ; n'ez eent ket er hreier saout, nemed re yen e ve er-mêz !

Nann ! strobinelou all eo a deue beb an amzer da glask trabaz ouz Ruz ! Peseurt re ? C'hoant am-oa da houzaud. Med kaset e vezen beb tro da zutal brulu ! An traou-ze ne vezont ket lavaret d'ar vugale. An dud vraz, a oar ! Ar re-ze o-deus skiant, m'hel lavar deoh ! hag unan anezo a lavaras d'am zad e ranked lakaad war an nor eur groaz — unan zero war ar marhad.

Atao ema hi eno a gav din ! Hag abaoe ne deuas ket mui ar strobinelou

Ma ouezfe e teufent en-dro ouz he zenna, m'her grafe, hag a jomfe kuzet evid gweled eur wech e va buhez ar strobinelou-ze am-eus klevet kement a gaoz diwar o 'fenn ez-vihan, a lakae an dud da glañva, dreist-oll d'ar zul da noz, gand o zaoliou êr fall, a lakee lod da vond da vizina e-kreiz an deñvalijenn, a droidelle bleo ar hezeg.

« Kemer eun tamm bara zeh en da zorn, lak da loer war an tu a-eneb, gand aon rag ar strobinelou », a veze lavaret d'in pa 'z een da vale noz ! Eet int kuit euz va bro heb dond da lavared din kenavo !

Pa deuen d'ar gêr euz ar skolach, e veze kavet labour d'ar hanfard a oa bet o tiskuiza, azezet war ar bankou e-pad tri miz. Arabad rei dezañ d'ober traou re denn. Diwall eur vloh n'eo ket diêz !

Ha me a yee da ziwall Ruz. O ! n'oa ket mignonez din evel Rondell goz San-drione. Dre va faot oa marteze ! Ne oan mui eur bugel. Erru oan da zen, ha d'an oad-se, pa vez eur vlevennig o klask diouana dindan, toullou ar fri, e kav deor beza leun a furnez hag a skiant. Ar vuhez a verv en or gwazied a ro deom eun tammig terzienn, hag a lak on daoulagad, pa n'eo ket or penn, da vadinella. Eur hleñved ive a oa krog ennon : kleñved al levriou. Lenn a ran-ken e peb leh, e'va gwele, er straejou, dre guz, pe a-hend-all ne hâllen ket mui bale heb eun euriou. An euriaou a blije din muioh eged Ruz ! Hag e-leh he diwall, me a yee va spered pell, pell. Kan al laboused e-kichen o neiziou, ar bleuniou, ar merien a jomen gwechall kement da zelled outo, hiboud ar mor braz o luskellad va huñvreou, nan ! nann ! echu ! Deski traou nevez eo a falveze din.

Hag hirio pa 'm-eus o desket, e karfen ober evel Etienn va hamalad euz a Zant-Pabu. « Ha me, emezañ, an eñrusa ma 'z on eo pa hellan mond da ziwall va saout ». Pegen diskuizuz ! Pell diouz an trouz, pell diouz loustoni ar

bed, e karfen distrei da blijadurioù glan va bugaleach ! Ha ma hellfen mond da ziwall ar saout ahont, gand Etienn, e bali dudiuz Lezvinihi, bezit dizoursi, ne vefe levr ebet ganin !

Med daoust ha va spered, kailharet ha distreset gand an oll draou distran-tel tremenet hebiou ennañ, a zo hoaz e stad da dañva kaerder levr braz an Aotrou Doue ha kaniri lirin ar mêzioù ?

Ruz, peurvuia, a beure dre ma helle a-hed ar straed. E toull eur hae e lennen. Pa zistroen war an douar, n'he gwelen mui, med eun tammig pelloh, m'he have o peuri atao ken fur ha tra.

Diou pe deir gwech koulskoude, kaer e oa din redeg, n'he haven ket. Inouet oa, douetuz braz, he-unan evel-se bemdez, hag e oe kavet e Kerhrah. Eet oa da weled he hamaladezed a wechall. Med an degemer n'oa ket bet dreist, enichañs, ha ne zistroas mui. Me avad a glevas grozmol, med n'oa netra e-kichen ar pezh am-oa da glevet an deiz diweza euz va buhez m'on bet o tiwall eur vloh !

Eur gwener oa. Brao an amzer ; eur pardaez dudiuz. Me a lenne. Va levr e-noa va hemeret krenn, peogwir, pa deuas da zoñj din em-oa eur vloh da ziwall, gwez Kerazal a deue da zuad. Mogidell a oa, gwir eo, med an noz n'oa ket pell. Me a redas dre ar straejou, war-du Kroaz-Wenn, Kergonan, ar Roz a-raog distrei d'ar gêr, bihan an tamm ahanon da anzav em-oa kollet ar vloh.

Va mamm, va zad ha me, peb hini diouz e du, a redas koulz lavared e-pad an noz ouz he hlask.

En eur dremen dre ar straejou don va-unan e soñjen en istorioù am-oa klevet e toull an oaled. Bremaig eh en em gavfe ganin ar strobinelou, ar goulou-red, paotred ar sabad, ar viltañsou ! Petra 'za ahont ? Eun dra wenn !

Med ar vloh a zo kollet. Red eo bale, bale, pe e klevin va 'fater. Eur haz noz a ra « miaou, miaou ! », eun aneval a dreuz ar straed d'ar red harp ennon ! Teñval sah eo. Tamm loar ebet. Hirio da vihanha n'eo ket al loar eo he-deus lakêd Ruz d'ober he 'fenn fall. Ha hoaz, piou a oar ?

Skuiz maro eh en em gavan er gêr, ar re all ive, ha Ruz n'eo ket kavet.

Va zad a zo eun den euz ar gwella, med pa stag gand al litanioù e pad pell an abadenn.

D'ar zul ez ee d'an overenn vintin. Pa lakee e roched frek eo e save ar jabadao ! Eur voutonenn a vanke, pe n'oa ket staget dirag an toull.

« Merhed, a lavaran me, ya, o pladorena e-pad m'emaon me oh en em laza ! Sell, eur voutonenn all o tistaga. » Paour kêz boutonou bihan, kouezet etre e grabanou na veze enno hed ar zizun nemed morzolioù ha mein ! Netra ne enebe outañ. Al loerou a lenve hag a zigore genaou ; al lasou botou n'int ket kerdin... a dorre.

« Traou brein ! ! pennad gal ! »

Neuze e save tolmopi avad ! An oll a oa pell zo dihonet, ha me a hoarze dre ma hellen, dindan va linser o klevet tonnou ar gerioù koant ha skleri-jennuz a groze war gein ar merhed.

Pa ranke lakaad e roched fin, d'ar gouelioù braz, neuze oa gwasoh hoaz. Soñj ho-peus, c'hwir ar re goz, euz ar roched-se, ampezet kaled, a entane deoh ho tivreh, ho chouk hag ho kouzoug ? O klask he boutona, pa gave ar boutonou, va zad a yee e kounnar Ruz. Gwelloh e ve bet gantañ tremen ar sul en eun askomb, a gav din, kentoh eged en e roched fin ! Ha me va unan a ve bet gwelloh ganin !

Ar gurun a groze beteg ma veze klevet taol kenta an trede son. Neuze va zad a zirape kuit. Gleb o c'hwazi e klaske e vouchouer fri. Allaz ! Goullo oa e hodellou ! Arhant eur banne pe zaou a oa koulskoude en eun tu bennag. O ne eve ket ! Eo, er bloaz m'oa flabik ! Ar flabiked a stag gand o devez sul en eur vond a-dreuz hag a-hed dre an iliz evid ar zant. Ha kemeret ganto ar pleg ez eont a-dreuz hag a-hed evid ar rest dervez ! Petra 'fell deoh ? Flabiked Lanbaol a zo heñvel ouz ar flabiked all !

Nann, eun den fur kenañ oa, hag eul labourer dreist. Savet e-neus euz e wella e vugale hag hirio e hell bale sonn e benn, kerkoulz ha n'eus forz piou !

Ruz a oa kollet. Ruz na oa ket kavet. Piou a glevas ? Va zro oa ! Ha n'em-oa ket a hoant c'hoarzin evel d'ar zul vintin e va gwele ! Greet e oa ahanon : panezenn, lechefe, lakepod, ha me oar me !

« Da veleg a lavaran me, da laer eo ez i ! »

N'out ket gouest da ziwall eur vloh, leue a zo ahanout ! Uriaou, uriaou ! m'henn desko dit, va 'faotr me ! N'eo ket an uriaou a roio dit da zebri. En tan, en tan, an uriaou ! hag e ri eun dra bennag gand da zaouarn, a-benn ar fin, evel ar re all !

Glapezenn zot ! Krevi a ri gand an naon, eun deiz. Ne ouezez ket ober eur siseurt. Debri latin a belli, n'eo ket an dra-ze da zalho en da zav !

Kenderhel a hellfen beteg warhoaz gand ar sourradennou a deuas beteg ennon. N'eo ket latin oant, med brezoneg yah, geriou hag a lake dioustu dirag ha taoulagad skeudennou, geriou hag a lavare ar pez o-doa c'hoant da lavared.

Hirio on eet en oad. Bet on bet war-dro bugale. Lavaret e vez : « Arabad mond morse e kounnar ganto ! » O ! a-wechou ne ra ket a zroug en oll. Me a gompren edon da damall en deiz-se. Va zad e-noa greet e zevez labour. Ha deuet d'ar gêr da ziskuiza, setu ma ranke tremen an noz, eñ, eur mañsoner, o klask eur vloh, ha d'an deiz war-lerh, mintin mad, kemer adarre ar morzol, ablamour ma n'am-oa ket greet an tamm labour ken êz roet din. Mad a reas mond e kounnar, rag me a gomprenas en deiz-se e rankom, n'eus forz e pe ieh, ober mad ar pez a zo fiziet ennom.

Eun dra all am-eus komprenet abaoe dre skiant prena. An den, zoken m'en em lak d'al labour a spered, a rank gouzoud ober eun dra bennag euz e gorr hag euz e zaouarn. Nag a bed, tud desket ha speredeg, am-eus gwelet o koueza, a-hont en Alamagn, ablamour ma ne ouient ket en em zervicha euz ar bin-viou roet dezo gand Doue ! Kollet ganto o uriaou, eh en em lezent da vervel gand an naon.

Neuze em-eus rentet bennoz d'am zad da veza komzet groñs d'in, ha da veza va lakeet d'ober eun dra bennag euz va bizied.

Ar sadorn a dremenas o redeg euz eur horn d'egile. Ruz ebed e neb leh ! An dud en eur ober goap a houlenne :

— Ha kavet ez-peus da vloh, Biel ?

Ha me zo asur a-dreñv va hein e lavarent d'o bugale :

— O ! gand a reoh, arabad deoh beza morse ken genaoueg hag hennez !

Merhed yaouank an ti all a hoarze d'in, ha n'eus netra hag a ve ken poaniuz da galon eur paotr n'e-neus nemed trizeg pe bevarzeg bloaz eged mouse'hoarz goapaüz eur plah yaouank.

Oll Lanbaol a ouie an istor : « Biel al lakez e-neus kollet e vloh ! » Hag e hoarzent. Me a zouble va 'fenn gand ar vez pa ganent :

Kavet 'peus da zaout, Yannig ?

Kavet 'peus da zaout ?

Ar sul a deuas hag e oe ranket inkanti e Lanbaol hag e Gwitalmeze e oa kollet eur vloh ruz.

D'ar pardaez e oe digaset ar helou edo e Kerlanou, eet d'ober lamm Sant Alar, douetuz, evel ar hezeg.

Pa deuas d'ar gêr, m'em-bije he lazet ar hagn goz !

Mab an Dig.

Ha c'hwi, Bretoned, penaoz e lavarfeh kement-man ?

gand an doktor TRICOIRE

Va mamm-gaer — Doue he 'fardono — a lavare : Peb hini e-neus « e damm tresou ». Peb pobl ive. A zo koantoh, eur frazenn dister, troet e meur a yez, a zo a-walh, a-wechou, evid henn diskouez splann d'an oll, e-giz m'emaoh o vond da weled.

En deiz-all, o vond da Bariz, edon azezet ouz taol, er vagon-restaurant, o hortoz va 'fred, hag o selled ouz ar skritellou marellet oh ober bruderez evid evajou a beb seurt, pa baras va zellou war eur skritell all, warni lizerennou metal lugernuz. Ha me da lenn :

On est prié d'exiger une note pour toute somme versée.

Si prega di esigere una ricevuta per ogni pagamento.

A bill should be made out and presented for every payment made.

Es wird gebeten nur gegen nota zu zahlen.

Eur frazenn troet e peder yez an hini eo, ha netra ken, a zoñjoh marteze. Ya. Med, daoust d'ar frazennig-se goulenn digand tud euz peder bro (ar Frañs, an Itali, Bro-Zaoz hag an Alamagn) ober eun dra heñvel-mik, ne vez ket savet ar goulenn en hevelebo doare ! Spered peb pobl a hall beza diskuliet a-dreuz peb troidigez euz ar frazenn-se.

Ar pez a fell d'ar gompagnunez etrevroadel euz ar bagoniou-restorant da gaoud eo heh oll arhant. N'eus nemed eun tu : ma vo roet eun notenn da beb klient evid peb tra, o veza ma chom neuze war garned an implijad eun eil-notenn evid ar gompagnunez. Piou a hallfe gouzoud, anez se, ped tasad kafe a zo bet servijet d'ar glianted ?

Ma ! Pa vezer e Bro-Hall pe e Bro-Itali, ez eus da zisfizoud euz ar vevelien, evid doare ! Ar glianted, e-barz ar broiou-ze, n'int ket pedet da *houlenne* (*demandar, demandare*) an notenn, da *houlenne groñs*, ne lavaran ket (*exiger, esigere*). Pez a ziskouez sklêr ha splann e fello da implijidi zo, klask chom heb rei notenn ebed, war zigarez pe zigarez : « La note ? oh ! excusez, monsieur, je suis pressé. Mais, ça n'a aucune importance : c'est le même prix ». Ha yao ! an arhant en e hodell, heb kont ebed da rei d'ar gompagnunez. E Bro-Hall e vezer « débrouillard », hag e Bro-Itali eun tammig muioh hoaz, 'm-eus aon.

E Bro-Zaoz, n'eo ket heñvel an traou. « Exiger » a vefe kavet « shocking » du-hont. Ar bobl-se a zo « fair-play ». N'eo ket red « pedi » an dud, zokén, evid ma vo grêt an traou e-giz m'eo dleet. N'eus ken nemed lavared fraez petra a zo da ober, hag e vo grêt. Sellit, kentoh : da gentañ, « eun notenn a dle beza savet » (*a bill should made out*) ; d'an eil, an notenn-ze a vo « roet (d'ar hliant) evid peb tra pèet (gantañ) » (*and presented for every payment made*).

Hag e Bro-Alamagn ? Du-hont, evel ma oar peb hini, eo an « disziplin » an hini a vez o ren. N'eus ket daou du da vond d'an dud : n'eus tu all ebed nemed gourhemenn. Eur gourhemenn eo a zo war ar skritell, e gwirionez. Eur gourhemenn seven, a dra-zur (gand ar verb « pedi »), nemed eur gourhemenn striz a-walh ive, berr ha mad : « Pedet e vezer da bêa hebken en eskemm d'eun notenn » (*Es wird gebeten nur gegen nota zu zahlen*).

Hag e brezoneg ? penaoz e tlefed lavared ? Peb hini e-neus e damm tresou... ar Vretoned e-giz ar re-all ! Penaoz e lavarfeh kement-mañ e brezoneg, lenner ker ? Kasit ho respont deom an abretañ ar gwellañ. Fiziañs em-eus e vo seurt labour kenteliuz evidoh, hag evid an oll. Rag, frouez an enklaskig-mañ a vo embannet e « Bleun-Brug », evel just.

KELEIER

KANV

Glaharet om bet o klevet maro truezuz Marie-Thérèse Séité, euz a Gleder, lazet d'he 10 vloaz. He zad, Pêr Séité, a zo breur d'an Ao. Visant Séité, sekretour-meur ar Bleun-Brug, d'an Ao. Beleg Job Séité, aluzenner Bleun-Brug Bro-Leon, da Vari Séité hag he-deus labouret kemend evid ar Bleun-Brug. Kinnig a reom or gourhemennou mantret da dad ha da vamm ar plahig, d'he zud-koz ha d'ar 'familh a-bez.

eul leanez hag a ra enor da vreiz

Al leanez *Marie de l'Eucharistie*, euz urz leanezed Santez Ursula a zo ganet e Montroulez; he ano er bed a oa an *dimezell Danielou*. Er bloavezh 1938 e oe bet kaset d'ar Brezil evid sikour sevel eur skol-veur e Rio-de-Janeiro. Hirio an de eus 250 studierez o tarempred ar skol.

Desket braz oa dreist-oll on leanez war ar gregach; hi eo he-deus savet evid ar Brezil leoriou grammadeg ha lizeradur gresianeg embannet diwar goust ar gouarnamant.

E miz Here 1955 he-deus bet digand Roue ar Grès eur gaer a vetalenn evid he zrugarekaad euz al labour dispar he-deus greet er Brezil evid sikour rei da anaoud ar yez hag al lennegzh gresianeg. Roet eo bet dezi gand Kannad ar Grès e Rio, dirag Kannaded On Tad Santel ar Pab, ar Frans hag an Almagn.

O tiskuiza emei bremañ en he bro hinidig hag e tistroio endro du-ze en eur dremañ dre ar Grès eleh ma vo greet dezi eun digemer mad, sur awalh.

PRIZ AN "entente culturelle bretonne"

Ar priz kenta, er bloavezh 1956 a zo eet gand *Maodez Glanndour* (an aotrou Loeiz ar Floc'h, person Louanneg). N'om ket bet souezet tamm ebéd o klevet eur seurt kelou, ni hag a oar e-neus gwestlet Maodez Glanndour e vuhez d'ar brezoneg ha da Vreiz, e-ser ober e labour a veleg.

Pell a zo dija ebaoe niverenn genta « *Studi hag ober* » renet gantañ ha gand an ao. Nedeleg, kelenner e Kloerdi Kemper; er bloavezh 1937 e oa. Ha goudeze « *Kaierou kristen* » er bloavezh 1945. Ar barzoneg hir « *Imram* » er bloavezh 1941 a ziskuilhas d'an oll ar skrivagner hag ar barz a oa anezañ Maodez Glanndour. Barzonegou all skañv o stumm, don ha pouezuz ar boued anezo, a oe embannet amañ hag ahont er helaouennou, menegom *Milc'huid ar serr-noz*, ha dastumet, eul lodenn anezo, el levr kaer « *Komzou bev* ». « *Ar Bedenn evid ar Vro* » a zo eul liamm etre ar gristenien kar o bro, med al labour talvoudusa moarvad e-no greet an aotrou L. ar Floc'h eo an hini a zo gantañ bremañ war ar stern, eul labour a vanah : *troidigez ar Vibl e brezoneg*, embannet dija lod anezi.

Nann n'om ket souezet e-nefe bet ar priz hag or-gourhemennou a gasom d'ar skrivagner ha d'ar barz, evel just, med ive da varnerien an Entente Culturelle evid beza e loreet. Salo o-defe beb bloaz seurt oberennou da lorea.

Le Gérant : Abbé BLEUNVEN, Curé de Saint-Renan.
QUIMPER, IMP. CORNOUAILLAISE. — C.P.P.P. N° 21697



da yeun ar gow, da harpa e lizer diwar-benn ar stummou dibersonel

Kredi 'ran em eus an dever da boueza war ar pezh ho-peus skrivet war « *Bleun-Brug* » Eost-Gwengolo diweza. Sonj ho-peus er pennad am-oa lakeet embann war « *Bleun-Brug* » Meurzh-Ebrel 1943. N'oa ket plijet d'an oll, d'ar mare-ze dija hag e responten e miz Du-Kerzu :

« Goulennet ez eus bet diganin diskleria e peleh e vez implijet an dro-lavar-ze. N'am-eus ket greet enklask piz ebéd. Eun Tregeriad a lavar din n'eo ket anavezet en e vro. Med evid Leon ha Kerne eo disheñvel. Implijet e vez e *Gorre-Leon* : Kleder, Rosko, Gwinevez... e *Goueled-Leon*, wardro Gwitalmeze, hervez an ao. Nedeleg, kelenner er hloerdi braz hag e-neus bet tro da houlennata kloareged... e *Goezeg* ha tro-war-dro hervez an aotronez F. Gueguen, Yeun ar Gow, Reunan ar Mogn, skrivagnerien brezoneg... wardro *Ploneour-Lanvern*, hervez an ao. Nedeleg. »

Ouspenn, ar pezh a zisplij din eo an doare amzeread da varn, pa gomzer euz « ijinadennoù » ; gwasoh hoaz, pa glasker flemma an ao. Falc'hun « eun du-mañ bennag (Klaoustre ez eo er Vourh-Wenn) ». Ouzin-me oa en em gemered pa 'z on bet da genta oh embann ano euz ar gourfenn-or e displegadur an aragennou. Eun ali a rofen : n'eo ket o ' flemma hag o hloaza eo e sachet tud davedor, ar hontrol eo, dreist-oll e Breiz. Ar Vretoned a vez atao troet da vond a di gand ar re a vez skoet warno, dreist-oll pa vezond direbech euz ar pezh a vez tamallet dezo.

V. F.



Buhez ar Bleun-Brug.

Goude devez studi *Plougerne*, ez eus bet eun devez studi all, d'ar 27 a viz Genver, e *Santez-Anna ar Palud*. Eur hant bennag a yaouankizou euz Bro-Gerne a en em gavas eno, gand eun amzer dispar. Eun devez muioh a dalvoudegezh da gonta e buhez ar Bleun-Brug.

An overenn, da 10 eur, er chapel, a oe lavaret gand an ao. Gourmelon, rener-skol e Pluguan hag aluzenner Bleun-Brug Kerne. An ao. chaloni Thomas, person Plunevez-Porze, a reas ar brezegenn hag a roas buhez d'an overenn. Kenteliou Santez Anna, da Vretoned an amzer-mañ, a oe danvez e brezegenn.

An aotrou Duigou, rener ar Progrès-Courrier, a zisplegas goude kudennoù an amzer vremañ e Breiz : kudennoù a zevenadur ha kudennoù ekonomikel.

Goude ar pred, kemeret a-gevret, hag eun taol dañs, an aotrou Omnès, kelenner e Lycée Kemper a gomzas euz ar hontadennoù e Breiz, o tenna anezo ar gelennadurezh hag ar henteliou a zere ouzom.

Evid kloza, kelh Lokronan aginnigas hag a lodennas gwastell ar roue, e-kreiz al levenez. Daou roue a oe ha diou rouanez, hag en a enor e oe kanaouennou.

An Doktor Philippe, rener Bleun-Brug Kerne, a ouezas, brao ha nerzus, tenna euz an devez-se, kenteliou euz ar re wella. Meuleudi da oll zaverien an devez kaer-se.

Or mignoned euz *Roazon*, an *Naoned* ha *Kastellbriant*, a gendalh gand o bodadegou mizieg dindan renerezh an aotrounez *Moal* ha *Falc'hun*. Diwar o labour eo ganet « *Les Cahiers du Bleun-Brug* ».

Sekretour ar Bleun-Brug, goude beza bet oh ober eur retred e Jersey, a gendalh gand e droiadennou er skolioù. Bet eo e *Brieg* (p.), *Langolen* (p. ha m.), *Kemeneven* (m.), *Treboul* (p. ha m.), *An Nivot* (p.). Kant skol all a zo ouz e hortoz e Bro-Leon.

Komite *Bleun-Brug Kerne* a zo bet en em vodet e *Lokronan*. Emañ dija B. B. Kerne lohet mad. Lazou-kana skollachou *St-Loeiz Kastellin*, *St-Yves* hag al *Likès* Kemper a gano an overenn-bréd.



Sant Herve a weler amañ hag oll zent Breiz, o devezo greet, sur om,
eun digemer mad, d'an aotrou chaloni Batany, a zo bet, en amzer vremañ,
an hini o anaveze ar gwella war an douar.